

ANVIOÙ HON LEC'HIOÙ (10)

Ken sebezus all gwelet *Plounez*, mamm barrouz, lec'hanv pennañ, am eus klevet distaget /plōne/ ha se en tu all da bont Lezardrev, bezañ troc'het diouti *Pempoull*. Ha distro an istor, *Plounez* lonket herie gant *Pempoull*. Ha piv a oar bremañ en pelec'h evit gwir emañ *Plounez* ? Bezañ *plou* ne oa ket ur statud asur ! En *Douarnenez* bepred : *Ploare* zo bet lonket gant ar gêr ivez. Ar memes tonkad gant *Plougêr* en *Karaez*. And so on... *Plougêr* zo un heklev d'ar *Poc'hêr*. Ar pezh a welfomp pelloc'h. Ha milendall an anvioù o kregiñ gant *Pl-*, *Ple-*, *Pleu-*, *Plou-* ha *P-* digavandenn zoken ? Ur wezh c'hoazh e rankomp goulenn sikour gant hon Erwan, an hini nemetañ bet o pleal da vat gant ar *plou* proklitek. Nag a dezennoù zo bet savet a-raok na vije studiet an traoù da vat gantañ.

Amañ un diverrañ eus taolenn Erwan Vallerie : an anvioù en *Pl-* zo peurliesañ gant anvioù tud (sent ?) o kregiñ gant ur vogalenn. Evel *Plabenneg* (*Abenneg*), *Plistin* (*Istin*, *Iestin* aet da *Jestin*), *Plaodren* (*Aodren*), *Pleskob* (*Eskob*), etc. Un afer a bouezmouezh an hini eo, splann. An anvioù all savet war *Ple-* evel *Plelann* (*Ploelan* en 1091), *Plijidi* (a oa *Ploesidi* en 1371 ha c'hoazh *Plésidy* evel stumm ofisiel hervez ar velestradurezh), *Plese* (*de Plebe que dicitur Sei* en 854, *Plessé* en ofisiel), *Pleren* entre an Alre ha Gwened (*Ploeueren* en 1402), etc. Anvioù savet war *Pleu-* evel *Pleuvihan*, *Pleuveur* (meur a hini ha moarvat dindan levezon an eil *eu*), ha d'am soñj-me *Pleurdud*, etc. Anvioù savet war *Plou-* (ur stumm hag a blij kalz d'ar reoù a fellfe dezhe adsevel kement anv warnañ ! pebezh kleñved avat... rak ober kement-mañ a vefe mont a-enep istor ar yezh, un istor hir) a gaver ar muiañ (soñjit en *Plougastell*, *Plourac'h*, *Plounez*, *Plourin* (meur a hini zo), *Plourivoù* (a glever distaget /Plouri'o/), *Plougêr*, etc... Hag en kichen an anvioù savet war *Plo-* evel *Ploare* (*Ploelre* en 1536), *Plozeved* (a oa *Ploetheuet* en 1216, bro an enbriedadezh sikouret gant an evañ re a alkool, da lârezh ur serten Edgar Morin hag e skipailh – sell un trevadenn), *Plogastell*, *Plogoneg*, *Ploneour*, anvioù lec'hiet en tro Bro-Vigoudenn hag ar bannlev... Anvioù savet war *Plu-* evel *Plufur* (moarvat diwar ul levezon eil *u*, a oa *Ploefur* en 1516), ha gwelloc'h *Plua* (*Ploedua* en 1371 ha n'eo ket sur zo anv amañ eus *Tual*...), *Pluguen* (*Ploecuvan* en 1220), etc... Marteze zo unan gant *P-* nemetken *Peaol* (*Ploiaule* en 1351), met se dindan levezon ar romaneg moarvat.

Bezañ e c'haller gwelet zo un doare heñvelidigezh en anvioù stummet. En kostez Treger, da skouer, zo un toullad en *Pleu-* : *Pleuveur*, *Pleuvihan*, *Pleuzal*, gant ur *Plou-* bennak evel *Ploubêr* (ur fent klevet penaos e vez distaget ar stumm ofisiel *Ploubezre* gant an diavaezidi, aketus o tistagañ kement lizherenn !). En tu all d'an Trev e kaver *Plaeraneg* diwar *Ploibanazlech* en 1224 (ar pezh zo *Ploubâz* en galleg tud ar vro herie !), ha pelloc'h, en penn all ar vro, e klever *Pornaleg* hag a oa *Ploebanazloc* en tro 1330, daou (pe div !) *blou* gant ar memes diazez o reiñ bep a identelezh. Se eo buhez yezh hon bro. *Plou-* ne blij ket dezhe !

Plou evel ger distag a veze implijet kalz da vare ar c'hrenvrezhoneg. Herie e vez implijet en un doare dibar da reiñ o anv da dud ur barrez, fin ur *bloue* ! Evel-se e klever *Plouiz-Kerne* evit tud o vevañ en *Plougerne*. Bezañ e rankomp merkañ e vez komprenet mat an div elfenn ac'h a da sevel an anv. Ar memes tra gant anvioù all, holl en Leon avat. *Plouiz-Dider*, tud *Plouider*, ma santer mat orin an eponim *Dider*. *Plouiz-Sane*, tud *Plouzane*. *Plouiz-Edern*, tud *Plouedern*. *Plouiz-Kadiz*, tud *Ploueskad*, gant ul liester merket div wezh. *Plouiz-Neour*, tud *Plouneour-Traezh*.

Derc'hel a ra *ploue* da vevañ...

Hag ar ger galleg *plouc* eta. Dont a ra eus hon *plou(e)* ? Gaston Esnault, bet oc'h embreger brav hengounioù pobl ha galleg Breizh-Izel ha brezhoneg komzet merket er skridoù eus an naontekvet kantved, en deus gwelet penaos e kaver ar ger *plouc* en 1880 en kement kêr zo en Breizh. Ur ger da envel ar beizanted gros eta. Aet war-raok en galleg gant ar brezel bed kentañ. Implijet gant Céline (*Mort à crédit*, 1936), ar pezh n'eo ket souezh pan ouvezer e liammoù gant Breizh... Esnault a gav dezhañ e teu eus apokop anv ur barrouz en plou, hag evitañ e c'hallje *Plougastell* (hini *Daoulaz*) bezañ an hini a glasker. Bezañ e welan daou dra : enebiezh pinvidigezh peizanted *Plougastell* ouzh micherourien baour ha disteraet Brest (tud an arsanailh, emezon), *Plougastell* ha Brest o vezañ tost-tost, hag ivez ar fed ma c'halver un den eus *Plougastell*, ur *Plougastell* ! N'eo diaes ijinañ ur *Ploug*... aet da *plouc*... Da notenniñ eo ivez *plouked* lesanv tud Kleden ha Beuzeg. Ul lesanv nevez ?

Hon Esnault en devoa diskoachet ivez an termen *plouquesse* (1918) evit ar merc'hed, hag an anv-gwan *déploucratisé* (1918 ivez), sklaer e dalvoudegezh ! Esnault en devoa ivez lakaet war wel ur ger all

ploum gant ur ster tost da hini *plouc*. Hennezh diwar an alamaneg *plump*. *Ploum* zo deuet war wel en 1882 ha n'eo ket dibosupl e vije bet distroadet gant hon *plouc*, hesonoc'h moarvat !

Bremañ pan vezomp lakaet da *Blouked* bezomp soñj eo bet ijinet ar ger gant ar Vretoned o-unan ! Met kement-mañ a ziskouez hon eus kollet kontroll implij ar ger... ar pezh zo reizh, naturel, ha me oar en istor kement yezh zo tout !

Un evezhiadenn diwezhañ : hon *ploueoù* n'o deus ket roet kêrioù, fin kêrioù bras. Ar c'hêrioù bras zo chomet entre daouarn ar braz eus al lec'hioù annezet gant saverien ar meuriadoù kozh (bezit soñj eus *Naoned, Roazhon, Gwened, Kemper*, etc.). Sede n'eo ket souezh gwelet an eneberezh entre maezioù ha kêrioù en anvioù hon lec'hioù. *Ploue* merker bras hon maezioù.

Herve Bihan

Levrlennadur

[a vo roet en dibenn al lodenn diwezhañ]